

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

54. (AR PLAC'H DIW WECH EUREDET)

Kenta maz iz davit dour da feunteun ar waz halek
 me a welaz va dous hag hen gwisket e skarlek
 hag hen goulén ouzin ha me voa demezet
 dre ma voan iaouankik ne greden ket lavaret
 hag hen kregi em dourn d'am sacha d'ar valanek
 ha d'am derc'hel eno ken a zavaz ar stered
 va list da vont d'ar gear ember me vo skandalet
 mem beuz eur wall lesvam a gement ve kavet
 mard eo eur wall lesvam evel a lavaret
 lavaret dezhi 'r feunteun a ioa troublet
 gant marc'h eun digentil o tistrei euz a naonet

Mar doc'h hu eun aotrou c'hiz ma kontit beza
 roit din eun dra bennag evit va sicour beva
 hag hen mont d'he c'hodel rei dezhi 500 skoet
 hag eur mouchouer kaer en he greiz 5 boked
 na livirit da zen penaoz po gounezet
 abarz 9 miz ama me duio darre d'ho kwelet
 hag a zigaso deoc'h klugeri ha kabonet
 hag eur voutaillad gwin koz evit deiz hoc'h eured

paket eo an 9 miz ha deut an dek dija
 komanz rea ar plac'h iaouank en em chagrina, chifa
 ha p'edo ° erru erru euz an naonet ° a-us : heu
 e kleve 'r zounerien o sani eu(z) ha eured
 p'oa deut ann noz ha lazet ar goulou
 neuze en em gavaz he aotrou ne zigorin ket d'hoc'h rak
 digorit din an nor ...ne zigorin ket eat on da gous-
 rak me zo em gwele hizio 'ma va eured ket
 X-ha digorit

n'loun ket evit digeri va daouarn zo occupet
 gant brid va marc'h ha va c'hleze alaouret
 me ia da zigeri 'n or pa oufen beza lazet
 rak kredi mad a ran 'ma aze va c'henta pried

pa voa digoret an nor hag elumet ar goulou
 pa doa en em velet oa dare dezho ranna ho c'halonou
 plac'hik diou wech eureujet, war da zourn kleiz ema
 walen genta da eured —

walen genta hoc'h eured ha pa zellot outhi
 plac'hik keaz c'houi a welo dourek
 rak c'houi ho peuz kollet roue an holl gwazed.
